

TROIAD

SINEMA E BREZHONEG EVIT AR SKOLIOÙ
KENURZHIET GANT DAOLAGAD BREIZH

DOSER AR SKOLAERIEN
Kinniget gant Daoulagad Breizh



ur Gitar er mor

Ur film bevaat
sevenet gant Sophie Roze



Heuzoù-nnoz

Ur film bevaat sevenet
gant Pierre-Luc Granjon

En doser amañ e kavoc'h ar respontoù da fichennoù ar skolidi ha kinnigoù abadennoù da gas er c'hlas war-lerc'h bezañ bet gwelet ar film. Evel-just, an holl draoù a vo kavet en doser-mañ n'int nemet kinnigoù, deoc'h da azasaat an abadennoù d'ho c'hoantoù, d'ho ezhommoù, ha da ezhommoù ha c'hoantoù ar skolidi ! Da azasaat eo an obererezhioù kinniget en doser-mañ hervez oad ha live ar skolidi ivez.

1) A-raok ar film: Studiañ ar skritell	3
2) An istorioù (Fichenn1).....	4
3) Ar sonerezh.....	4
a. Anavezout ar binviñ sonerezh (Fichenn 2)	
b. An dañs (Fichenn 3)	
ch. Da betra a servij ar sonerezh?	
4) Kejañ.....	6
a. Kejañ evit ar wech kentañ	
b. Degemer ha rannañ (Fichenn 4)	
ch. Bezañ komprenet (fichenn 5)	
5) An arz.....	8
a. Ar gwagennoù (Fichenn 6)	
b. Heuzoù-noz : teknik buheziñ (Fichenn 7)	
ch . Garlantez kravatennoù	

1) A-raok ar film : Studiañ ar skritell asambles

Sellet ouzh ar skritell asambles a-raok an abadenn a sikouro ar vugale da dennañ o mat eus ar filmoù pa voc'h er sinema.

Setu ul listennad goulennoù (ha respontoù posubl) evit sikour!

- Peseurt tudennoù a vez gwelet ? Petra emaint oc'h ober ? Tri loen a vez gwelet. Galloud a rit diskrivañ anezho. N'eo ket aes gouzout peseurt loened int. Daou anezho a zo o seniñ : unan gant ur gitar, egile gant un benveg a denn d'un akordeoñs, met un tammig disheñvel marteze. O sellet an eil ouzh egile emaint. Ul loen all a zo er foñs, pellkoc'h gant ur valizenn c'hlas.
- Pelec'h emaint ? Gwenn eo al leur, un draezhenn eo marteze. Un tan a zo o lugerniñ war an tu kleiz. Er foñs e vez gwelet gwez, ur c'hoad eo marteze.
- Da beseurt mare eus an deiz ? Noz eo anezhi, du eo an oabl.
- Peseurt trouzioù a vez klevet d'ho soñj ? Sonerezh an daou venveg, trouz ar mor, an avel, trouzioù an noz (laboused-noz,...), trouz an tan.
- Petra a zo skrivet gant lizherennoù bras ? “Ur gitar er mor”. Petra eo ? Titl ar film. Gwelet a rit ar gitar ? Ar mor ?
- Gant tout an dra-se, galloud a rit empennañ un tammig petra a dremen er film ?
- Petra a vez gwelet ouzhpenn tout se, un tammig izeloc'h er skeudenn ? Un dresadenn wenn ha du e traoñ ar skeudenn, gant un titl all : “Heuzoù-noz”. Un eil film a vo skignet, ouzhpenn an hini kentañ. Deus petra a vo kaoz ennañ d'ho soñj ?



2) An istorioù FICHENN 1 :

→ **Respontoù :**

Fotoioù *Heuzoù-noz* en urzh :

- 1. **Eliot a zo ouzh taol gant e familh**
- 2. **Eliot a red betek ar c'hoad**
- 3. **Eliot a gej gant ar c'hrouadur**
- 4. **Eliot a zistro d'ar gêr**

Fotoioù *Ur gitar er mor* en urzh :

- 1. **Ar gaerell-vras a glask gwerzhañ he c'hraatennoù da loened an ti feurm**
- 2. **Ar gaerell-vras a gej gant an heureuchin**
- 3. **An heureuchin hag ar gaerell-vras a gej gant ar c'hapibara**
- 4. **Ar gaerell-vras hag ar c'hapibara a adkav ar c'hoati**

Obererezhioù ouzhpenn :

Gant fotoioù ar FICHENN 1, ur wech graet ar c'hoari, e c'hellit lakaat ar vugale da gomz en-dro deus istor an 2 film (an tudennoù, al lec'hioù, urzh an darvoudoù en istor).

Gall a rit ivez lakaat anezho da geñveriañ an 2 film. Peseurt diforc'hioù o deus gwelet etre an 2 film (a-fed livioù, padelezh, sonerezh...) ? Petra a zo boutin etre an 2 film ?

3) Ar sonerezh

a. Anavezout ar binviji sonerezh FICHENN 2

Ar sonerezh he deus ur perzh pouezus er film “Ur gitar er mor”. Evit kaout soñj eus sonerezh ar film, galloud a rit sellet ouzh ar filmig-brud-mañ, klevet vez anezhi un tammig :

https://www.youtube.com/watch?v=3S9wvQlc_HQ

→ **Respontoù :**

Ar binviji implijet evit sonerezh ar film a zo :

ar gitar, ar bandoneon, ar valizenn

Ur wech graet ar c'hoari e c'hellit komz deus ar familhoù binvioù evit mont pelloc'h ganti :

binviji dre c'hwezh, binviji dre gerdin, binviji-tos.

Deus peseurt familh eo pep daouad ?

- Binviji dre c'hwezh : **boest-an-diaoul ha bandoneon**
- Binviji dre gerdin : **gitar ha violoñs**
- Binviji-tos : **djembe ha malizenn** (ar valizenn a vez implijet evel ur “cajon” er film)

Loto da selaou :

Evit donaat kizidigezh ar vugale d'ar sonerezh, e c'hellit ober ul “loto da selaou” evit anavezout ar binviji sonerezh. War al lec'hienn amañ dindan ez eus peadra da bellgargañ unan. Kalzig a binviji a zo da lakaat da zivinout, n'eo ket ret ober pep tra, gall a rit ober un dibab. Lakit ar vugale da selaou ouzh ur benveg, ha bannit ouzh an daolenn ar plankenn skeudennoù lec'h ma vez gwelet ar benveg-se, d'ar vugale da lâret peseurt hini eo. Evit ar re vrasañ e c'heller ober memes mod hep bannañ ar skeudennoù, ha lakaat ar vugale da reiñ anv ar benveg gant ar son nemetken.

<https://dessinemoiunehistoire.net/loto-sonore/>

b. An dañs FICHENN 3

→ Respontoù :

- 1. **Tango** a vez dañset er film
- 2. Skeudenn **B**

ch. Da betra a servij ar sonerezh ?

Galloud a rit prederiañ gant ar vugale war perzh hag interest ar sonerezh, er filmoù, hag er vuhez dre vras. Setu un nebeut goulennoù evit sikour gant ar preder. Evel-just ez eus ur bern respontoù posubl, ne vo ket ar memestra evit an holl ! An dra-se eo a zo dedennus, kompren eo liesseurt an doareoù da selaou sonerezh.

→ Ober ul listenn deus al lec'hioù ma vez klevet sonerezh enno : er gêr, en oto, er gourmarc'had, en abadennoù, er festoù-noz, e-pad ur gouel, en toull-noz...

→ Piv a selaou sonerezh d'ho soñj ? Ar pal a zo lakaat anezho d'en em rentañ kont e vez selaouet sonerezh gant an holl dud, n'eus forzh pelec'h er bed, hag a-holl-viskoazh : ar sonerezh a zo un dra boutin d'an denezh a-bezh !

→ Ha selaou a rit sonerezh ? Peseurt hini ? Da beseurt mare ? Hoc'h unan pe gant tud all ?

→ Perak e selaouit sonerezh ? Petra a ra deoc'h ? En ho korf, en ho penn, en ho kalon ?

→ Peseurt stiloù sonerezh a anavezit ? Ober ul listenn gante : Rap, pop, klasel, tango, hengounel Breizh, rock, metal,... Peseurt soner.ez pe kaner.ez a anavezit ?

→ Gwelet ho peus un abadenn sonerezh e gwir ? Pe un den o seniñ ur benveg bennak ? Plijet oc'h bet ?

→ Ha seniñ a rit c'hwi ? Peseurt benveg ? Kanañ a rit ?

→ Ur wech kaozeet mat e c'heller ober ul listenn evit respont d'ar goulenn : da betra a servij ar sonerezh. Un nebeut mennozhioù evit sikour : da zañsal, da gaout plijadur, da nompas kavout hir e amzer, da zizoloiñ sevenadurioù all, da brederiañ, da gaout fromoù, da vezañ frealzet, da vont da gousket, da zihunañ, da gaout kalon d'ober un dra bennak, da c'hoarzhin,...

Bonus : Vidéo “Pourquoi écoute-t-on de la musique” ?

https://www.youtube.com/watch?v=NIN2V_1Kjm4&ab_channel=InfoouMytho%3F

4) Kejañ

a. Kejañ evit ar wech kentañ

Setu daou foto, unan o tont deus pep film, o tiskouez daou vare ma vez kejet gant un dudenn nevez evit ar wech kentañ. Galloud a rit bannañ ar fotoioù-mañ ouzh an daolenn hag implijout anezho evit respont asambles gant ar vugale d'ar goulennoù amañ dindan.



Er film *Ur gitar er mor*

- 1. Ar gaerell vras hag an heureuchin a zo spontet bras pa gejent gant ar c'hapibara evit ar wech kentañ. Perak d'az soñj ?

→ **Respontoù posupl :**

Aon o deus peogwir eo ar wech kentañ dezho gwelet ur c'hapibara, peogwir e vez lâret gant an holl ez eus un euzhvil er c'hoad, peogwir e c'hoarvez e-pad an noz,...



Er film *Heuzoù-noz*

- 2. ar paotrig a gej gant ul loen dianav ha souezhus. Petra eo doareoù ar paotrig o kejañ gantañ ?

→ **Respontoù posupl :**

Ar paotrig a zo souezhet, met n'en deus ket aon. Komz a ra d'ar c'hrouadur diouzhtu. Buan a-walc'h e seblant bezañ laouen da vezañ kejet gant ur mignon nevez.

- 3. Daoust hag eo ar memes doare eget re ar gaerell-vras hag an heureuchin dirak ar c'hapibara ? Perak, hervezout ?

→ **Respontoù posupl :**

N'eo ket tamm ebet ar memes doare o deus. Marteze peogwir n'eo ket aonik ar paotr, peogwir e kompren n'eo ket dañjerus ar c'hrouadur, peogwir n'en deus ket aon er c'hoad, peogwir e oar n'emañ ket pell e gerent...

- 4. Ha te, aon peus bet o sellout eus ar filmoù ? Gant ar senennoù-se pe gant senennoù all deus ar filmoù ? Petra peus santet o sellout ouzh ar senennoù-se?

- 5. Ha te, en em gavet out dija gant ul loen pe un den dianav, pe drol, pe dic'hortoz ? Peseurt doare 'peus bet d'ar mare-se ?

b. Degemer ha rannañ FICHENN 4

→ Respontoù :

- 1. Ar c'hrouadur a bed ar paotrig.
- 2. Ar c'hapibara a bed an holl loened da evañ un banne mate.
- 3. Ar paotrig a brof e heuzoù d'ar c'hrouadur . Souezhet ha laouen eo.

ch. Bezañ komprenet FICHENN 5

E-barz “Ur gitar er mor”, ar c'hapibara hag ar c'hoati a gomz kastilhaneg, peogwir eo ar yezh a vez komzet en Arc'hantina, o bro orin. Ar gaerell vras hag an heureuchin ne gomzont ket kastilhaneg, neuze eo ret kavout doareoù da gompren an eil re hag ar re all hep komz.



1) Pa vez gwelet ar gitar gant ar c'hapibara e ra un dresadenn d'ar gaerell-vras ha d'an heureuchin evit displegañ ar pezh en deus c'hoant da lâret (galloud a rit bannañ an dresadenn ouzh an daolenn evit respont asambles). D'az soñj, petra a dalvez ? Skriv ar frazenn a felle dezhañ lâret.

→ Respontoù :

Da skouer “Emaon o klask war-lerc'h ur c'hoati, ar gitar-se a zo dezhañ, ha gwelet ho peus anezhañ?”

2) Ar gaerell vras hag an heureuchin a glask displegañ d'ar c'hapibara an titouroù roet gant al labous war ar c'hoati. An heureuchin a ra ur mim evit pep ger, evit bezañ komprenet gant ar c'hapibara. Dit da liammañ pep mim gant ar ger a glot :

→ Respontoù :

- A → Ar wezenn
- B → Al lenn
- CH → Ar gitar
- D → Ar c'hoati

5) An arz

Heuzoù-noz, Ar skramm spilhoù :



Ur gitar er mor : ar bevaat gant stummoù (Stop motion)



Ur gitar er mor : paper didroc'het



3 zeknik disheñvel a zo bet implijet er filmoù kinniget : teknik ar skramm spilhoù evit Heuzoù-noz ha teknikoù ar bevaat gant stummoù hag ar paper didroc'het evit Ur gitar er mor. Evit gouzout hiroc'h diwar-benn an teknikoù :

Ar bevaat gant stummoù : Graet e vez fotoioù eus un endro ennañ traoù ha tudennoù. Etre pep poltred e vez fiñvet pe treuzfurmset an elfennoù-se un tammig. Heñvel a-walc'h eo an teknik-se ouzh hini an tresadennoù-bev, met gant traoù gwirion.

Ar paper didroc'het : Gant an teknik-mañ e implijer tammoù paper evit taolenniñ tudennoù, traoù pe endroioù. Graet e vez ar bevaat o fiñval anezho tamm-ha-tamm hag o poltreidiñ pep pazenn eus al lusk.

Ar skramm spilhoù : Implijet e vez ur skramm graet gant miliadoù a gorzennoù gwenn, ma riki spilhoù enno, evit krouiñ ur skeudenn. Gant ar gouloù taolet ouzh ar skramm e teu ur skeudenn en amskedoù, da lavaret eo e gwenn-ha-du, gant arlivioù gris. Poltredet eo pep skeudenn, ha lakaet e vez ar skeudennoù asambles evit krouiñ ar bevaat.

a. Ar gwagennoù FICHENN 6

Ar gwagennoù a zo bet graet gant **paper didroc'het**.

b. Heuzoù-noz : teknik bevaat / Obererezh dorn : Ar c'hoad gant pikoù FICHENN 7

Sellit asambles ouzh ar filmig bet graet evit displegañ d'ar vugale an teknik implijet evit sevel "Heuzoù-noz". (e galleg) <https://www.youtube.com/watch?v=BF1jqX6Mss8>

Peogwir eo bet savet "Heuzoù-noz" gant teknik ar skramm spilhoù, gwelet e vez ur bern pikoù bihan-tout er skeudenn. En istor al livañ, ez eus un teknik anvet "poentigouriezh" (le pointillisme) a implije pikoù livaj evit tresañ ! Galloud a rit diskouez livadennoù Georges Seurat d'ar vugale.

Gant ar skouer-se : livit ur c'hoad gant pikoù nemetken !

https://www.dropbox.com/scl/fi/p50051gnyilax9z967gf7/GUITARE_CA_A4-OK.pdf?rlkey=mtj6tamkx61062xwfdspfdses&e=1&st=f39sq9ud&dl=0

Dafar :

- Skarzhoù skouarn
- Livaj (posubl eo labourat e gwenn ha du, evit tennañ d'ar film, ha neuze kemer livaj gwenn, gris ha du, pe labourat gant a bep seurt livioù)
- Paper Canson
- Kreion Koad / Gomenn



Pazenoù :

• Pazenn 1 :

Hervez an oad, reiñ skeudenn ur wezenn pe ur forest da livañ (skouerioù er fichennoù skolidi). Diwallit, hir eo leuniañ un dresadenn gant pikoù, azasaat ment an dresadenn d'an oad !

• Pazenn 2 :

Prientiñ al livaj : lakaat un dakenn deus pep liv a vo implijet war un tamm plastik.

• Pazenn 3 :

Trempiñ ar skarzh skouarn el livaj (ar gwellañ a zo kregiñ gant al livioù teñvalañ), ha livañ ar c'hoad oc'h ober pikoù. Arabat implijout ar skarzh skouarn evel ur barr-livañ, ar pal a zo leuniañ an dresadenn a bikoù nemetken !

• Pazenn 4 :

Evit ar re a zo en o aes, kinnigit dezho dereziañ al livioù : ober ul lodenn gant gwer teñval, war-lerc'h gant gwer un tammig sklaeroc'h, hag echuiñ gant gwer sklaer.

• Pazenn 5 :

Skritellañ an oberennoù, bravoc'h e vint o sellout outo un tammig eus a bell !



ch. Garlantez kravatennoù

Greomp asambles evel an heureuchin er film “Ur gitar er mor” : ur c’harlantezenn gravatennoù ! E-barzh ar film e ra evit lakaat ar c’hravatennoù da sec’hiñ, ni a c’hell hen ober evit ar blijadur !

An dafar :

- Ratailh danvez a bep seurt livioù ha tresadennoù
- Tammoù kerdin
- Sizailhoù



Pazennoù :

• Pazenn 1 :

Didroc’hañ tammoù danvez, war-dro 4 cm ledander ha 30 cm hirder

• Pazenn 2 :

Stagit anezho ouzh an tamm kordenn, gant ur skoulm simpl. Laoskit plas bewech etre pep kravatenn. Klaskit ober distokoù ingal a-walc’h. Cheñchit livioù alies !

• Pazenn 3 :

Didroc’hit penn pep tamm lien evit reiñ dezhañ stumm ur gravatenn !





Diwar an doser savet e galleg gant Little KMBO
Gouzout hiroc'h war ar filmoù war :
<https://littlekmbo.com/distribution/une-guitare-a-la-mer>
Warni ez eus kinniget ur bern obererezhioù all e liamm gant ar filmoù.

Teuliad azasaet gant Manon Renault
Adlennet gant Lena Catalan Marcos, kempennet gant Marianne Larvol

DAOULAGAD BREIZH
13 straed/rue Michel Le Nobletz 29100 DOUARNENEZ
02 98 92 97 23 - contact@daoulagad-breizh.org - www.daoulagad-breizh.org